

Baccalauréat général et technologique
Langues vivantes régionales - Breton

Classe de première

Compréhension de l'écrit et expression écrite
(3^e trimestre)

<u>Niveau visé</u> LVB : A2-B1	<u>Durée de l'épreuve</u> 1 h 30	<u>Barème 20 points</u> CE : 10 points EE : 10 points
---	---	--

L'ensemble du sujet porte sur l'axe 8 du programme : « **Territoire et mémoire** »

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d'**une heure trente** pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) **en breton**.

Ur vuhez o kanañ

Marvet e oa Yann Fañch Kemener d'ar 16 a viz Meurzh tremenet, da 61 bloaz. Unan eus mouezhioù kaerañ Breizh e oa.

Ur bern tud a oa deuet da Sant Trifin d'an 19 a viz Meurzh tremenet, evit obidoù Yann-Fañch Kemener, falc'het gant an Ankoù goude ur c'hleñved start. Kaset e oa bet an oferenn e brezhoneg penn-da-benn, ha selaouet e oa bet barzhoneg Anjela Duval « Pa vin marv » paneveken, enrollet gant Yann-Fañch Kemener e-unan.

Ganet e voe an nen e Sant Trifin, ur barrez vihan a vro Fañch, e kreiz-Breizh. Desavet e voe e brezhoneg gant e dud na ouient ket galleg pe nebeut. Yann-Fañch yaouank a ziskouezas buan bout dedennet gant ar c'han. Deskiñ a reas kanañ gant Eugène Grenel hag Albert Boloré dreist-holl, daou ganer eus e vroig. Dre forzh mont da zañsal er festoù-noz e pignas war al leurenn d'e dro, evit kanañ gant komperien. Adalek ar mare-se ne ehanas ket da ganañ, evit lakaat an dud da zañsal, kan-ha-diskan, peotramant gwerzioù, kanaouennoù da selaou.

Ken entanet e voe gant ar c'han e brezhoneg ma yeas d'e dro da zastum kanaouennoù kozh digant an dud. Gant ur c'harned hag ur c'hreion da gentañ, ur mekanik da enrollañ goude-se, e vernias ur bern sonennoù ha gwerzioù, evel Fañch an Uhel pe Kervarker en e raok. Nemet e kane anezhe war al leurenn diwezhatoc'h.

Anavezet 'oa Yann-Fañch Kemener evit bout ur c'haner ampart, dibaoe pell. Er bloavezh 1976 e c'houezas ar C'han ar Bobl ha goude-se e krogas da enrollañ

pladennoù arc'hant. « Chants profonds de Bretagne » da gentañ, un dastumad gwerzioù embannet gant Arion, kanet hep benveg sonerezh ebet, ha dousennoù anezhe er bloavezhioù war-lerc'h.

Yann-Fañch Kemener a gemeras perzh en droiad sonadegoù « Hêrezh ar Gelted », gant Dan ar Braz hag arzourien all, a reas berzh-spontus er Frañs a-bezh. Ur strollad sonerezh hengounel a grouas ivez, Barzaz e anv, ha kenderc'hel a reas e labour kaner e meur a zoare disheñvel.

E 2009, e labour a voe enoret gant Urzh an Erminig hag e 2015 e voe graet Chevalier des Arts et des Lettres.

Sot e oa Yann-Fañch Kemener gant sevenadur poblek Breizh hag ar brezhoneg. Goude bout desket kalz digant ar re gozh e oa krog da stummañ kanerien yaouank en ur ganañ gante, ha tud o teskiñ brezhoneg en ur greizenn stummañ, pe e skol veur Roazhon.

Pouezus-tre eo al labour kaset da benn gant Yann-Fañch Kemener evit reiñ da c'hoût d'ar Vretoned petra eo o sevenadur. M'eo tavet mouezh ar c'haner hiziv, ar gwerzhioù hag ar c'hanaouennoù difoupet gantañ a vo klevet e-pad pell c'hoazh.

Diwar *Magazine Penn ar Bed*, n°153, miz Even 2019,
<https://www.e-mag-pennarbed.fr/edition-153/bzh/>

1. Compréhension de l'écrit (10 points)

Eus petra zo kaoz en destenn-mañ ?

Penaos e c'hell bezañ liammet ouzh an danvez-studi « An teroueroù hag an eñvor » ?

2. Expression écrite (10 points)

Respontit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrid a 120 ger d'an nebeutañ.

Goulenn A

Desket ho peus un dra bennak, paseet deoc'h gant ho tud-kozh pe gant un den all. Kontit.

Goulenn B

« Ken entanet e voe gant ar c'han e brezhoneg ma yeas d'e dro da zastum kanaouennoù kozh digant an dud. » Pouezus eo, d'ho soñj, ober ur seurt labour dastum, pe vefe war ar c'hanaouennoù pe c'hoazh ar yezh, an dañs, an dilhad... ? Perak ?